

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Merc'hedigoù Plougerne**

Merc'hedigoù Plougerne, *lonla*  
Merc'hedigoù Plougerne  
'Zo desket ez-vihan, *digodondène madondène*  
'Zo desket ez-vihan, *digodondène o ma dondé.*

C'hwi 'vezo kaset d'an aod, *lonla*  
C'hwi 'vezo kaset d'an aod,  
Da zastum ar bezhin, *digodondène madondène*  
Da zastum ar bezhin, *digodondène o ma dondé.*

N'emañ ket ar c'hiz ganto, *lonla*  
N'emañ ket ar c'hiz ganto,  
Da lakaat tavañjer, *digodondène madondène*  
Da lakaat tavañjer, *digodondène o ma dondé.*

Kignat a reont o bragoù, *lonla*  
Kignat a reont o bragoù,  
Diouzh ar mor, er foarioù, *digodondène madondène*  
Diouzh ar mor, er foarioù, *digodondène o ma dondé.*

Merc'hedigoù Gwiseni, *lonla*  
Merc'hedigoù Gwiseni,  
M'ho peus c'hoant dimeziñ, *digodondène madondène*  
M'ho peus c'hoant dimeziñ, *digodondène o ma dondé.*

Na dit ket da Gerlouan, *lonla*  
Na dit ket da Gerlouan,  
En ali chom en ti *digodondène madondène*  
En ali chom en ti, *digodondène o ma dondé*